

Penoas eo stalliet an traoù?

Setu ar perzh a zo da lenn a-raok kregiñ gant an oberezh. Kavet e vo ganeoc'h an urzhioù a rankoc'h doujañ outo eus penn kentañ an droiad betek ar fin skeudennaouet e vint gant poltriji.

Dafar



Ur bodriel asambles gant tri stag. Un tokarn gant ur rod-kentre evit e reoliñ. **Trugarez da chom hep en em stagañ kenetrezoù a-istreibilh ouzh ar c'hrogoù-dafar (ne c'hellont ket dougañ ouzhpenn 5 kg nemetken).**



Daou stag nerzhoniell ur c'hod ruz warno gant ur c'hroig hag ur mouskedig damotomatek. Ur stag difiñv gant ur pole hag ur mouskedig damotomatek warnañ. Evit e zigeriñ e ranker kas ar walenn orañjez d'an traoñ ha boutañ war ar biz.

Plañ an droiad



Plañ hollek an droiad gant ar postoù mont er-maez 1, 2, 3 ha 4.

Folenn deskrivañ



War an hentad a-raok bep stalier e tizolooc'h ur banell o kinnig deoc'h dre ur skeudenn kuzulioù hag urzhioù surentez.

Araogadennoù a-blom



Diwallit ! Evit mont war-raok evit pignat pe evit diskenn e rankit kaout ur stag a-us d'ho parlenn atav.

Evit pignat :

Emañ va stag kentañ e-barzh ar rodellad, va eil stag a zo em dorn ha kerkeret ha ma c'hellan tizhout ar rodellad kentañ en em stagañ. Ha kement zo tout ...

Evit diskenn :

Bez ez eus ur stag e-barzh ur rodellad hag e tiskennan gant va eil stag em dorn betek ma lakain ar stag kentañ da stennañ ha nemet ha nemet d'ar poent-se e c'hellan lakaat va eil stag e-barzh ar rodellad dre zindañ. Ha kement zo tout ...



Kregiñ a ran gant an droiad, va c'hrog a lakan e-barzh ar blakenn hag ouzhpennañ a ran va mouskedig war ar fun houarn.



Evit dibab da belec'h mont n'eus nemet sevel ar bladennig kreiz hag ober d'ur c'hroig-tro ganti betek an tu dibabet.



Evit plakennoù an dirolanenn e lakaan va c'hrog da dremen etre ar starder-fun hag an ere evit en em stagañ.



Lakaat a ran va fole war ar fun dirak va c'hrog hag ouzhpennañ a ran va mouskedig dre zirak va fole. Gwiriat a ran e ruilh mat ha lakaat a ran va c'hrog ha va mouskedig war penn uhelañ ar pole.



Azezañ a ran penn-da-benn er bodriel. Evit chom eeun dindan an dirolanenn, n'em eus nemet lakaat va daouarn an eil war egile war ar pole. Sevel a ran va divesker en ur zerc'hel va daoulin stok-ha-stok ha dao dezhi !



Ma ne zeuan ket a-benn da vont betek penn an dirolanenn e troan war va c'hostez ha lakaat a ran va daouarn a bep tu d'ar pole. D'ar poent-se e c'hellan mont war-raok betek penn en ur sachañ war ar fun.



E penn all an dirolanenn, sevel a c'hrog hag ar mouskedig evit lakaat anezho en-dro war ar fun.



Gallout a ran neuze distagañ va fole ha stagañ anezhañ a-istreibilh ouzh unan eus an dougoù-dafar a zo a pep tu d'ar bodriel.

! Evit abegoù surentez eo difennet-groñs c'hoari lamm-dilamm war ar fun. Trugarez deoc'h !